

E Iliz Gwitalmeze, en amzer dremenet,
Loden euz ho relegou a zo bet henoret.
Piou en doa o digaset? N'heller gouzout ervad:
Heb mar Alan Koativi, kardinal ha Breizad.

Goude an dispac'h euzuz a lakaz reuz er vro
Pell amzer int bet kollet, n'oa mui sonj anez-o;
Mez hirio, dre c'hras Doue, int adarre kavet
Ha var eun aoter nevez en hon iliz savet.

C'houi roe, var an douar, d'ar c'hlanvour ar pare
Ha d'ar galon goullet an dizoan adarre,
Bezit sonj ouz hor poaniou euz lein ar baradoz,
Hor mirit euz ar pec'hed, Sant Visant, deiz ha noz.

Goude ken braz madelez ho peuz bet evit Breiz,
N'hon dilezit ket hirio, grit ma vimp stard er feiz,
Roit d'eomp doujanz Doue hag e varnedigez,
Ma ne zizonjimp morse en hor silvidigez.

Ha pa deui pred ar maro, Sant Visant, d'ho kwelet
Ha d'ho meuli ni yelo da lez kaer an Drinded
Tad, Mab ha Spered-Santel, tri hag unan hebken,
El leac'h ma vezimp curuz gant Doue da viken.

IMPRIMATUR :

Kemper, 21 a viz genver 1925.

P. MESSEGER,
Vik. vras.

14 940 — Imp. rue du Château, 4. — Brest.

Evit Goueliou bras Translation Relegou

SANT VISANT FERRIER

e

Gwitalmeze

22—23 A VIZ EOST 1925



Tad : Ar re unanet, pe : Patronez dous ar Folgoat

DISKAN

Sant Visant, kannad Doue hag henor an Iliz,
C'houi a zo deut da gelen gwehall an Arvoriz,
Grit eur zell a drugarez ouz hor bro Breiz-Izel,
Hirio pedit evidomp, roit d'eomp ho skoazel.

Ervez ar vrud, pa 'z edo ho mam ouz ho tougen,
D'eur baourez dall e roit a-grenn ar sklerijen:
Kenta burzud, a zigor ero ar burzudou
A ziwno niveruz dre nerz ho pedennou.

Eun tad hag eur vam gristen o deuz, yaouankik-flam,
Desket d'eoc'h karet Doue hag ar Verchez dinam;
Hag en ho kalon dener, e sklerijen ar feiz,
Bleunen gaer ar zantelez a gresk a zeiz da zeiz.

A-zevri gant al labour, aketuz d'ar beden,
C'houi a ouezo kastiza ho korf er binijen;
Dre ar yun hag ar skourjez e vezo reizet mad;
C'houi a reio aluzen d'ar paour, d'an emzivad.

Neuze, gant grad ho kerent, c'houi c'houlennno digor
E kouent Valencia, er Spagn, var ribl ar mor,
El leac'h m'ho kalvo Doue en deuz ho tibabet
Evit prezeg e lezen, d'an ampoent dilezet.

An ifern zo dirollet, Satan zo mestr ar bed,
E pep korn euz an douar direizded ha pec'hed,
Gadelez ha plijadur, n'euz ken e-touez an dud
A zo kouezet ken izel hag anevaled mud.

Eun deiz, evel eun drompilh, eur vouez a dregerno,
Hag an dud, ouz he c'hlevet, spountet a zihuno:
« Krenit d'ho puez diroll, lenvit d'ho pec'hejou,
Bremaik e teui an Aotrou da varn hoc'h oberou.

Dre ar c'hèriou, ar mèziou, dizamant d'ar skuizder,
E valeit heb ehan, rag n'ho peuz ken preder
Nemet digas da Zoue an denved dianket
A gloze var-n-o, siouaz! skilfou an drouk-spered.

Evel merk ho kefridi, c'houi bare dre vuzud
Tud dall ha tud mac'hagnet, tud bouzar ha tud mud,
Ha beteg ar re varo a zav euz an arched
Da ziskouez ez eo Doue en deuz ho tigas.

A-ben diou vech hoc'h unan, den zantel, ho kwelor
Euz eur c'hlenved o sevel yac'h pesk, ha c'houi toc'hor;
N'eo ket peurc'hrêt ho labour, ha Doue ho pare
Evit mont dre an hentchou da brezeg adarre.

Ar Spagn hag an Itali, hag hor Bro-C'hall ive,
Bro-Zaoz, bro ar Jermaned ho klevaz, den Doue,
Hag hon Duk Yan ar Pempved en deuz bet an henor,
Leun a zoujans evidoc'h, d'ho kervel d'an Arvor.

Beleien hag Eskibien a ro d'eoc'h digemer
Evel da Gannad Doue, da Brofed ar Barner;
Hag an dud a villerou, o skei var o c'herc'hen
A c'houlennno trugarez, a reio pinijen.

E Keraez, e Kemperle ni gavo ho roudou,
E Pont 'n Abad, Konk-Kerne e rit prezegennou,
E Kemper, e Lesneven, Kastel ha Montroulez
Ho peuz bleinet hon tadou var hent ar zantelez.

Ho kaout a reomp, Sant Visant, en Naoned, e Gwened,
Dre Zant Briek ha Treger c'houi a zo tremenet,
Sant Malo, Dol ha Redon ha kalz a geriou all
A oar oc'h deut d'o gwelet ha d'o c'helen gwechall.

Mez Gwened ar gêr eüruz, a zalc'h ho relegou,
Eno 'teuit da vervel goude ho labourou;
Janned, Dukez Breiz-Izel, merc'h da Roue Bro-C'hall
Eo he deuz ho sébeliet, ar c'hlac'har var he zal.

Eun deiz d'Alphons Borjia (1) c'houi ho poa lavaret
E vije divezatoc'h var dron Sant Per savet,
Hag er bloaz pevarzek-kant ha pemp hag hanter-kant,
Gant ar Pab Kallixt trede ez oc'h diskleriet sant.

(1) Alphons Borjia, hanvet da Bab, a gemeraz an hano a Gallixt III.